

Communiqué par Vallée.

Bue Santez Trifina

ha Sant Tremeur hi Bugel

BUE SANTEZ TRIFINA

HA SANT TREMEUR HI BUGEL

War don : BUE JENOVEFA pe eun all.

I

Tostâd, tud vad a Vreiz-Izel,
Da glevet eur vue zantel,
Bue Trifina, groeg nerzuz,
Bue Tremeur, den vertuzuz.

Trifina mamm, Tremeur bugel,
O-daou ganet en Breiz-Izel,
A rei, 'n eur glevet o bue,
D'imp holl karet gwelloc'h Doue.

Santez Trifina oa ganet
E-barz an eskopti Gwened,
Hi zad Gwerok, prins gallouduz,
A oa den mad ha vertuzuz.

En eur skol ken kaer ha ken mad,
Ar verc'h a deue da greskâd
En gened, en diskadurez,
En doujans Doue, en furnez.

Mez e-tal Gwerok e veve
Ar prins Komor, den didrue,
Komor, spont euz holl dud ar Vro,
Den a dorfet, den a varo.

Ar prins fall an nevoa lazet
E holl vroage dougerezed ;
Rak meurbet braz oa e greden
En falz-lavar e zorzerien.

« Komor, eme-int, diwalled,
Gant ho map c'houi 'vezo lazet ;
Na dimezet biken da verc'h ;
Rak c'houi 'nevo keûn braz war-lerc'h. »

Koulskoude, 'n eur weled, eun de,
Santez Trifina, war vale,
Komor an euz bet lavaret :
« Trifina, c'houi 'vo d'in pried. »

Gwerok, d'eun hevelep goulen,
An euz spont braz, an euz anken.
« Penoz rei ma merc'h, emezan,
D'ar fallan den deuz ar vro-man. »

Komor, deuz e du, 'n euz galvet
Sant Gweltaz, gant Gwerok karet,
Dre ar zant an nevoa fe vad
Da drec'hi war galon an tad.

Sant Gweltaz, rak aon a vrezel
Etre tud ken braz hag huel,
A deuaz holl d'o unani,
'N eur ober d'ar verc'h dimezi.

Gant lid braz e graet an eured,
Ha Komor, leun a joausted,
A gas gant-an e vroeg santel
Evit chom dalc'h-mad 'n e gastel.

Mez, ô merc'h vad, pebez glac'har !
Heb-dale Komor, prins digar,
E-lec'h e garante gentan,
An euz poan d'ho kweled breman.

Gweled a ra, na vo ket pell,
E tleed kavet eur bugel ;
Ha falz-lavar ar zorserez
A ro d'ezan tristidigez.

Pellât, merc'hik paour, ha hasted
Da vont da di ho tad karet ;
Rak laket an euz 'n e galon
Rei tol ar maro d'e itron.

II

« O ma Doue mad, emezi,
Pebez den fall, pebez den kri !
Petra, Komor, am euz-me graet ?
Siouaz ! re am euz ho karet !

« Ma matez vad, Yvona ger,
Hastomp, na gollomp ket amzer ;
Dalc'hed mad ma c'hazek velen,
Arc'hoaz, beure mad, er zaounen (1). »

(1) Traouienn.

Goude, p'e deuz graet hi heurjou,
Daoulinet, 'n eur skuilhan daërou,
E ra hi fedenn da Jezuz
Hag hi c'hlemmou ken truezuz :

« O ma Doue, ô ma Zalver !
Pebez rustoni em c'henver !
Nin, groage paour, 'zo, peurvuian,
Karget a boaniou, er bed-man.

« Na c'houlennan ket, koulskoude,
'N em glemm deuz-oc'h, ô ma Doue !
Rak, me gred, c'houi a rei pep tra
Evit gloar ha mad Trifina.

« Eur c'hraz hebken a c'houlennan :
Graet d'am fried, eun de, gouelan
War e dorfejou ken spontuz ;
True war-n-ezan, ma Jezuz !

« D'ar groage paour, en o foaniou,
Gwall-gaset gand o friejou,
Roet, m'ho ped, nerz ha douster
D'o lakad mad en o c'henver.

« En hano ar bugelik mad
A dougan gant gwall-galonad,
Roet grasou d'ar vugale,
Pa deuoint da weled e ve.

« D'an dud paour hag emzivaded,
D'an dud en poan, d'an dud nec'het,
Roet bepret kalon nerzuz :
Graet war-n-e eur zell truezuz. »

Neuze, heb trouz hi 'deuz savet...
Komor, 'n e wele, oa kousket :
Hag er mez, war gein hi c'hazek,
E kerz da Wened, 'n eur redek.

III

Komor, d'ar beure, 'n eur zével,
Gant konnar hag eur vouez huel,
An euz goulennet, dreist pep tra :
« Pelec'h, pelec'h 'man Trifina ? »

A-boan an euz peurachuet,
Ha war e varc'h an euz redet ;

« Trifina, n'halli mui tec'hel !
Trifina, red e vo mervel ! »

Netra na drec'h war an den kri,
Nag hi daouarn kroazet gant-i,
Nag hi c'homjou ken glac'haruz,
Nag hi sellou ken truezuz.

Evelt eur blei gand eun danvad,
E tifreuz hi blev, hi dillad,
Ha gand eun toll deuz e gleve
E lemm d'ar vroeg paour hi bue.

Trifina, beuet en hi goad,
Zo dilezet en-kreiz eur c'hoad ;
Hi fenn zo deuz-i distaget...
Elez Doue, deut d'hi miret !...

IV

War-lerc'h e dorfet, an den fall,
A red, gant hast, en eur iudal,
Da Gastel-Finans, e balez,
Savet e-tal gwaz vraz Blaouez.

Ar vevelien 'deuz lavaret,
Pa welont e gleve ruïet :
« Hon mestrez ker a zo maro !...
Ah ! pebez koll evit ar vro !...

« Trifina, prinsez ar gwellan,
N'hallimp ket trawalc'h d'ac'h gouelan !
Demp, na veomp ket divezad,
Da dougen ar c'helo d'hi zad. »

An tad, 'n eur glevet hi maro,
A skuilh daërou stank ha c'houëro.
« Trifina, ma merc'h ar gwellan,
Pebez glac'har d'in-me, breman ! »

Hag ar c'horf, gant Gwerok hi zad,
A zo douget gant kalz a stad,
En e balez, gand enor braz,
Da c'hortoz e vignon Gweltaz.

Rak-tal e red d'an abati,
E komz d'ar zant, 'n eur hirvoudi.
Gweltaz, 'n eur weled e vignon,
A ro d'ezan nerz ha kalon :

« Gwerok, Gwerok, ma mignon mad,
Laket termen d'ho kalonad...
Doue a dei da denna gloar
Deuz torfet eur prins ken digar. »

V

Ar zant na goll ket an amzer ;
Mont a ra betek ar muntre ;
Mez klozet eo d'ezan an nor
Dre gourc'hemen ar prins Komor.

Sant Gweltaz, pa 'n euz bet gweled
Ar c'hoant fall deuz an den kollet,
An euz graet an dro d'ar c'hastel,
'N eur gomz d'ar prins a vouez huel.

Pa wel nan eo ket chilaouet,
Rak-tal Gweltaz 'n euz daoulinet,
Ha 'n eur dol eun dornad douar,
Ar zant d'ar pec'her a lavar :

« Malloz d'an den treitour d'e c'hir !
Malloz d'ar galon houarn ha dir !

Malloz da vuntrer Trifina !
N'an nevo ken eurvad na joa. »

A-boan ar zant an euz komzet,
Rak-tal ar c'hastel 'neuz straket ;
Komor, blonsed gand an toliou,
A red pell, dreist d'ar meneiou.

VI

Goude kement-man, sant Gweltaz
Da gastel Gwerok a redaz,
Da gambr Trifina dibennet,
War eur gwele kaër astennet.

War e zaoulin, 'n eur hirvoudi,
E ped an holl bobl da bedi,
Hag e lak ar penn war he skoa,
'N eur gomz gant nerz deuz Trifina :

« Ma merc'hik ker, ô ma bugel !
En hano d'an Drindet santel,
Tad, Mab, Spered glan, eun Doue,
Hadkemeret, c'hoaz, ar vue !... »

Kaer e oa da welet neuze,
Gwerok, evelt en eun hunvre,
Ha Trifina, war hi daoulin,
O laret gant eur vouez sklintin :

« O Doue ! pegen evuruz
En em gaven gant ma Jezuz !
Mez, d'ho mouez, ma zad binniget,
Ma ine d'am c'horf 'n euz nijet.

« Eur c'hraz, breman, ô ma zad mad :
Graet ma chomin gen-ec'h, dalc'h-mad.
Me 'bedo Doue, noz ha de,
Da c'hortoz termen ma bue.

« — Biskoaz manac'h, eme ar zant,
'N euz bevet gant merc'h, 'n eur gouant.
Chomet gant ho tad, 'n e gastel,
Da c'hortoz kavet ho pugel. »

VII

'Benn eun nebeud amzer goude,
Trifina 'bed an den Doue

Da vadezi, da vinnigan
Eur bugelik deuz ar c'haeran.

« Tremeur, emezan, 'vo hanvet,
Em manati e vo zavet ;
Tremeur a vo den vertuzuz,
Tremeur a vo mignon Jezuz. »

Ar bugel a dremen pemp pla
En-kichen e vamm Trifina ;
Neuze, 'n eur ouelan, ar vamm vad,
Evit pell, a deu d'hen kuitad.

En-touez al leanezed
Rak-tal hi deuz en em dennet,
En eur c'horn e-tal gwaz Blouavez ;
Eno e veve gant furnez.

VIII

Trifina, merzerez gwirion,
C'houi an nevo c'hoaz poan-galon
Rak Komor, an den konnaret,
A glask ho pugel binniget.

Kavet a ra, 'n eur lec'h distro,
Ar bugel a glaske pell-zo,
Ha, gant eun tol, an tad digar
A string e benn war an douar.

Mez o burzud a-beurz Doue !
Tremeur dibennet a gerze ;
War e zaouarn e toug e benn,
Betek e vamm leun a anken.

A-boan ar zant 'neuz diredet
En-kichen e vamm glac'haret,
E kouez maro war an douar,
Hag e ine a nij d'ar gloar.

Trifina, gand eur glac'har braz,
War gorf hi map a lavaraz :
« Gloar, ma Doue, gloar d'ar merzer !
Pardon, ma Jezuz, d'ar muntre ! »

Eun nebeud goude, Trifina
A varv en peuc'h, gant kalz a joa.
Laket int o-daou en eur be,
An eil en-kichen egile.

IX

Breiziz, ma breuder, pa gerzed
War hent Santez-Anna-Gwened,
'N eur dremen en kichen Blaouez,
C'houi 'gavo roudou ar zantez.

En Sant-Inan, c'houi c'hell gweled
Eur mene euz a c'hoad karget :
Er lec'h-ze 'n em gav eur feunteun,
Eno Trifina 're pedenn.

En Laniskad e weler c'hoaz,
Chapel ha feunteun sant Gweltaz ;
Eno Trifina 'o'houlenne,
Digand ar zant, nerz d'hec'h ine.

Nin ho salud, gant levenez,
Douar Trifina, gwaz Blaouez,
Lanneier, koajou binniget ;
Hon zent koz 'neuz war-n-oc'h kerzed.

Aman, 'liez, nin daoulino...

Gand avel, kan evned hon bro,

Nin 'dei d'unani hon feden...

Ha c'houi 'dei, sent mad, d'hon difenn !

War hent Santez-Ana-Gwened

N'eo dre ar c'hloer Breiz

C'houi gant ar c'hloer Breiz

Amen !

GLOAR DA ZOUE HA D'AR WERC'HEZ !

En Sant-Juan, c'houi c'holl gwel

N'eo dre ar c'hloer Breiz

C'houi gant ar c'hloer Breiz

En Sant-Juan, c'houi c'holl gwel

J.-L. R...,

Person.

En Sant-Juan, c'houi c'holl gwel

N'eo dre ar c'hloer Breiz

C'houi gant ar c'hloer Breiz

En Sant-Juan, c'houi c'holl gwel

Nin ho stind, gant levez

Donn' ar c'hloer, gant levez

Lander, kaset diniget

Hon sant ha'n c'hloer